

# DONEDIGUEZ

HEP DALE

AN AUTROU AN DUG

HAC

AN ITRON AN DUGUES A NEMOURS

E MONTROLEUZ.

Var ton : *Chantons l'Hymen, chantons l'Amour.*

Breizis ! bezomp oll en joaüded :  
An Dug a Nemours hac e bried,  
D'hor peurgarga eus a levenez,  
A deu da Vontroulez.  
Bugale qer ar Roue  
A bossedimp, dre c'hraç Doue ;  
Hac en güir Breiziadet,  
Hor joa vras vo d'o güelet. Breizis.

Ar bemp-varnuguent eost, pe vardro,  
E vo'r Prinç hac ar Brinces er vro ;  
Rac se eta bezomp preparet  
Hep dale d'o güelet.  
Dre hent Paris e teuint,  
Hac en antre kær e vezint  
Gant ar brassa respet  
En joa an oll recevet. An ugent.

Diredid oll, tud divar ar mèz ;  
Diredit buan da Vontroulez :

Hastit da zont da guemeret pers  
Ebars en hor Gouël bers.  
Calz plijadur ho pezo ,  
Rac amusant a vezo :  
Danç-tro ha jabadao ,  
A blich calz d'hor merc'het brao.     Diredid.



Mes dreist oll, c'houi, merc'hed yaouanc coant,  
A ra eus hor brô an ornament ,  
Deut da gaerat dre ho prezañc ennâ ,  
Joaüstet ar Gouël-mâ.  
C'houi ive, potret yaouanc ,  
Laouen evel Bretonet franc ;  
Ho presañc a dra sur  
A rayo demp plijadur.     Mes.



An tyes hac ar vatimanchou  
A vo ornet a bavillonou ,  
Ha pa vezo an nôs arruet ,  
E vo illuminet.  
Ézet vo da bepini  
Pourmen dre gær gant e hini ;  
Rac an oll ruyou kær  
A vo rentet meurbet sclêr.     An tyes.



En deiz eürus-se , kær Montroulez  
A vo en he brassa levenez :  
An oll a vo en rejouissañc ,  
Vit Mab ar Roue Franc.  
Ne vanqit qet , mignonet ,

An deiz-se amâ da zonet ;  
Ar Gouël vo dudius :  
Peb Breiziad a vo joaüs. En deiz.

Bezomp sonch mad er gourach ardent  
Eus an Dug a Nemours, Prinç vaillant,  
Pa voe kær Constantin qemeret  
Var dud cris 'vel tighet :  
E creiz ar c'harnach goassa,  
Dre humanite ar vrassa,  
E galon generus  
A gri : « Graç d'ar maleürus !... » Bezomp.

Enor ha gloar ra vezo rentet  
D'an Dug a Nemours ha d'e Bried !  
An oll a zo joaüs en hor Breiz,  
Ouz o c'haout en hor c'hreiz.  
Dreist oll, ni, tud Montroulez,  
Qen eürus d'o c'haout en hon touez,  
Criomp a greiz calon,  
Evel Breiziadet güirion : Enor.

Gloar ive d'an Dug yaouanc d'Aumal,  
En deus roet d'an Arabet ar bal,  
Er gombatjou en bro an Alger,  
O frott' Abd-el-Kader.  
Ar Prinç zo, dre c'hraç Doue,  
Deut da gaout e dad, ar Roue,  
Leun eus a gonfianç  
Da veza enor ar Franç. Gloar.

E Montroulez, ar Prince a Joinvil,  
Hac e Bried, Princes ar Bresil,  
Ar bemp varnuguent a vis Gouere  
Gant joa a errue.  
Na pebes contantamant  
Voa o velet, ar c'houpl charmant!  
Redet a rêt gant joa  
Evit dont d'e admira. E Montroulez.

Trincomp, evomp, canomp ha c'hoarzomp,  
En eur guer, en em divertissomp.  
Breizis a dle beza tro vardro

Güir exempl da bep bro.  
Dre oll o anavezet  
Evit beza potret ceder,  
Leal ha deread,  
Ha dreist oll 'vit potret vad. Trincomp.

